



ABADENNOU STUDI HA DUDI AN DISTAGADUR HAG AR POUEZMOUEZHIAÑ

KEAV 2016

PERAK OBER ABADENNOU-KENTELIOU WAR AN DISTAGAÑ HAG AR POUEZMOUEZHIAÑ ?

Ur yezh vurzhudus eo ar brezhoneg : ar c'hentelioù brezhoneg a vez graet ordin, abaoe bloavezhioù, a-viskoazh kazimant, hep displegadennoù distagañ pe pouezmouezhiañ (lavaromp DPM, berroc'h e vo), hep ober difaziadennoù DPM. Penaos e teu an deskarded da zistagañ mat ha da bouezmouezhiañ reizh ar brezhoneg ? Peogwir eo ar brezhoneg ur yezh vurzhudus pa lavaran deoc'h ! Nemet e vefe dre ar Spered Santel ? Ya, dre an natur, dre anien : ar Vretoned a zo ginidik a Vreizh, dre natur neuze e teu dezhe ar pouez-mouezh brezhon !...

Trawalc'h a farserezh !

Pep hini a oar pe en deus douetañs ez eus a bep seurt abegoù... Hag a bep seurt mareoù, amzerioù...

Un amzer a zo bet e oa brezhoneger ar gevredigezh war ar maez (hep mont re bell en a-dreñv en istor...). Er mare-se, pa ne veze ket gouezet brezhoneg gant un den, ar re all a oa tro dezhañ a zalc'he da gaozeal brezhoneg. Da neuze, e veze, er c'hentelioù brezhoneg, e-touez ar gelennerien, un nebeud tud hag a oa brezhonegerien a-vihanik. An elfennoù kentañ a veze tapet a ziwarne ha goude-se ar re a faote dê gwellaat o DPM ac'h ae war-ar-maez da « soubañ » e bed ar brezhoneg...

Un tammig diwezhatoc'h, er bloavezhioù tri-ugent pe dek-ha tri-ugent, e veze memestra dre vras, met rouesoc'h oa ar vrezhonegerien a-vihanik e-mesk ar gelennerien, startoc'h e oa kaout ar stummadur kentañ ret war an DPM evit gallet mont war ar maez ha tennañ gounid gwirion. Mesketoc'h oa an dud, eus pep korn peurliesañ e veze an dud a gaved er c'hentelioù. Ha kement a zoare a zo da gomz brezhoneg ! Ar c'helenner, pa ouie mat penaos e veze lavaret en e vro, ne ouie ket hag-eñ e oa reizh ar mod-mañ pe ar mod-se da zistagañ ar brezhoneg. Ha ne reizhe den !...

Ha, n'eus ket ken pell-se, a zo deuet hentennoù kenteliañ nevez ma ne vez ket displeget tra, ar skolidi zo dav dezhe adlavaret evel a ra ar skwer, evel ar c'helenner kea. Met daoust hag-eñ e veze, e vez komzet mat, distaget mat, pouezmouezhiet reizh gant ar c'helenner ? Ar pezh a zo sur, dre vras ne ouient ket petra zo reizh ha petra n'eo ket pa ne oa ket bet desket dê. Ha bremañ c'hoazh eo memes mod !

Arabat teuler ar bec'h war ar gelennerien : ne oa ket ha n'eo ket aezet... Kement a zoareoù a zo da zistlipañ ar brezhoneg ! Penaos gouzout petra a zo reizh da vat ha petra n'eo ket ? Setu un danvez studi ! Hag ar yezhourien a oar penaos, pa vez kemmoù bras er gevredigezh, e c'hoarvez kemmoù bras ivez e yezh ar gevredigezh-se. Daoust hag-eñ ez eus bet c'hoarvez kemmoù evel-se e brezhoneg war dachenn an DPM ?

Peadra zo da labourat ! Da studial ha da gaout dudi !

PENAOES HA WAR PETRA E VO LABOURET ?

Dielfennañ hag anavezout diwar glevet ha diwar gomz ar perzhioù a ya d'ober muzik ar brezhoneg.

Reiñ da bep hini da glevet e vouezh hec'h-unan o klask produiñ peotramant adober ar perzhioù a zo lakaet war wel diwar skouerioù tennet eus dielloù liesseurt (filmoù, kontadennoù, ...).

Sikour pep hini da glask e hent ha "krediñ mont dezhi" betek reiñ da glevet ur muzik yezh ken tost eus ar brezhoneg ha ma c'hell bezañ.

Pal kentañ ar prantadoù labour a zo reiñ d'an dud da santout, da glevet ha d'ober o-unan kentoc'h evit studiañ ar reolennoù a ya d'ober ar sistem yezh. Bez e c'hello ar stajidi tennañ o mad eus an atalieroù seul welloc'h ma vo sonenrollerioù ganto.

Ur roll eus neuzioù fonetik ar brezhoneg hag a vo gwelet ha pleustret mod pe vod warne a c'hallomp reiñ :

- ar sistemoù pouezmouezhiañ e brezhoneg ar gwalarn (KLT) ha brezhoneg ar gevred (Gw) : ar perzhioù boutin hag an diforc'hioù.
- soniadoù ha skrivadoù,
- elfennoù a fonetik,
- distagañ ur vogalenn hir en ur silabenn pouezmouezhiet
- distagañ ur vogalenn verr en ur silabenn pouezmouezhiet, e gerioù unsilabennek ha liessilabennek, e gerioù pouezmouezhiet war an eil silabenn diwezhañ ha war ar silabenn diwezhañ ; kensonennoù gwan, kensonennoù kreñv,
- anavout lec'h ar pouez-mouezh er gerioù e brezhoneg ar gwalarn klasel hag e brezhoneg ar gevred klasel ; ar stropadoù gerioù a zo da vezañ distaget evel ur geriad hepken,
- gouzout pe hir pe berr eo ar vogalenn er gerioù unsilabennek ; sandhi kensonenn/vogalenn ; sandhi kensonenn/kensonenn, etre ar gerioù, etre rannoù ar gerioù e-barzh ur ger kenaozet ;
- roll ar sandhioù er c'hemmadurioù diglok en anvioù-gwan war-lerc'h an anvioù-kadarn ;
- ar soniadoù : [e] / [ɛ] ; [y] / [x] / [h] ; [o] / [ɔ] ; hag all hag all ...
- an taolioù-mouezh er frazenn...
- An tremen a vras etre ar rannyezhoù hag ar reizhskrivadur.

ANV :

Lennet em eus programm ar c'hentelioù **Distagadur – Pouez-mouezh** ha kadarnaat a ran va dibab da heuliañ ar rummad kentelioù-se bemdez, eus 9 eur da 12 eur diouzh ar mintin hag eus 2 eur da 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.